



KATARSIZ

sant Genovefa STEVEN



AR GEVNIDENN

7
HAÑV 1973

K A T A R S I Z

gant Genovefa STEVEN

Pemp eur e oa, pa savis. Divizet 'm boa sevel abretoc'h, met ne oan ket deuet a-benn da zihuniñ. An ti a oa didrouz. En em wiskañ a ris hep en em walc'hiñ rak trouz an dour o redek en dije dihunet va ziegezh a-bezh. Va sac'h e-kichen va gwele a oa prest abaoe an derc'hent, ne oa ket kalz traoù ennañ : un nebeut dilhad solut ha tomm, ur sac'h-kousk hag un deltennig war-c'horre pep tra.

Kemer a ris ur c'hreion hag ur follenn baper... petra lavarout da'm c'herent ? Ne ouien ket. Ne'm boa netra da lavarout. Mont a ris e'm sav ha digeriñ an nor goude bezañ taolet ur sell diwezhañ war bep pezh arrebeuri, pep kinkladur, pep korn eus ar pezh. Keuz a'm boa un tammig o kuitaat ar gambr-se, va c'hambr, el lec'h ma'm boa nouspet gwech leñvet, c'hoarzhed, poaniet, huñvreet. Va bed e oa, va baradoz. Ne oan ket sur e tistrofen un deiz er gambr-se. Ar follenn baper wenn a oa war ar gwele didreset, neuze e serris an nor gant aked.

Ur wech er-maez, ne ouien ket peseurt hent kemer. A-gleiz pe a-zehou ? Ne raen forzh. Ar pezh a gonte a oa : mont kuit, mont pell, bezañ dieub.

Kerzhout a ris pell amzer a-raok chom a-sav, edon e-kichen ur c'hoad. Ne ouien ket e pelec'h edon, ne glasken ket gouzout kennebeut, ne'm boa hent resis ebet da heuliañ, na pal ebet da dizhout. Ar c'hoad a oa bihan ha plijus, azezañ a ris ouzh kef ur saprenn ha debriñ un tamm bara a dennis eus va sac'h. Kontañ a ris neuze an nebeut arc'hant a oa ganin. Ne oan ket chalet gant se, ober a rafen tro ar bed hep ur gwenneg. Seizh eur e oa.

"Ne vin ket klasket, ne vin ket adkavet. Va gortoz a raint, int, va c'herent, ha n'eus forzh penaos, ne reont foutre kaer ac'hanon. Ne'm c'haront ket, n'o deus morse va c'haret. Difennet o deus ouzhin bezañ eürus, difennet o deus pep tra ouzhin. Ha neuze, perak bevañ ganto en ur bed goullou, dister ha serret ? Perak ?"

E miz gouere edomp, kuitaet 'm boa ar skol dek devezh a-raok ar skolidi all. Ur bloavezh fall hag arabadus e oa bet. Abaoe pell e'm bije kuitaet ar skol ma ne vijen ket bet rediet gant va c'herent da genderc'hel. Morse ne oan bet dedennet gant netra er skol, ha ne'm boa morse komprenet da betra e talvezze din pezh a zes Kemp dindan eñvor evel pedennoù. Gwelet e oan fall gant ar gelennerion, c'hoarzhin a raen o soñjal en tabutoù a'm boa bet ganto. Ne'm boa ket aon da lavarout dezho petra soñjen eus o c'hentelioù goullou. Kelenn a raent dimp darvoudoù didalvoud, danvezioù na servijint din morse e'm buhez da zont. Koll a raen va amzer en O skol !

Skuizh e oan o vale dindan tommder an heol o skeiñ war va choug. Met kenderc'hel a raen da vale, hep gouzout da belec'h ez aen. Chom a raen gwech an amzer a-sav evit butuniñ ur sigaretenn, azezet e goudor ur wezenn bennak. Ar gouerion en o farkeier a baoueze a labourat evit sellout ouzhin o tremen. O saludiñ a raen gant va dorn hag e respontent din. Moarvat en em c'houlennent da belec'h e oan o vont va-unan, ur sac'h war va c'hein, me ne ouien ket muioc'h egeto.

Da seizh eur noz e savis va zeltenn e-kreiz ar maezioù. Edon en ur prad nepell diouzh ur vereuri. Sellout a ris ouzh an heol

o vont da guzh; an hevelep kuzh-heol hag an hini a welen eus prenestr va c'hambred e oa, bravoc'h marteze. Naon a'm boa met ne zebris mann, ne'm boa netra da zebriñ, neuze e klaskis kousket evit ankouaat ne'm boa netra e'm stomok abaoe pemp eurvezh. Daoust din bezañ skuizh ne zeuen ket a-benn da gousket. Klask a raen divinout penaos e oa an devezh el lise hepdon, heñvel moarvat, Padrig a gompreno tamm-ha-tamm eo echu hon flirt, ne oa ket bet gwir garantez etrezomp. Hag er gêr, ar c'hunujennoù a-dreñv va c'hein, ar pellgomzadennoù, ar predoù gant bugale fur ha spontet. Ne oan ket chalet gant se, dieub e oan. DIEUB !

Antronoz o tihuniñ e lennis eizh eur war va Montr. Poan a'm boa e'm izili goude bezañ baleet kement. Digeriñ a ris va zeltenn ha skinoù an heol a zeuas tre. Redek a ris war-du ar vereuri e-kichen. Ur vaouez kozh o treuziñ ar porzh, ur sailh en he dorn, a sellas ouzhin en ur vousec'hoarzhin :

"Un dra bennak ho pefe ezhomm ?" emezi.

"Ya", emezon, "dour evit en em walc'hiñ, mar plij".

"A ! C'hwi eo a zo o kampiñ e'm fark ?"

"Ya, va digarezit, ne'm eus goulennet an aotre digant den".

"N'eo ket grevus. Deuit, setu aze ez eus ur c'hog dour. Leinet hoc'h eus d'an nebeutañ ?"

"Nann", emezon.

"Neuze, deuit da evañ ur banne kafe da'm zi goude", eme ar goueriadez.

Petra 'm boa graet d'ar vaouez-se evit ma ve ken hegarat ganin ? Met ne nac'his ket mont da evañ ur banne kafe, er c'hontrol, laouen ez asantis. Pa erruis er gegin edo ar goueriadez kozh o lakaat ar c'hafe tomm war an daol.

"Setu", emezi, "evit kafe ha debrit kement ha ma fell deoc'h.

Ar re yaouank a gred e c'haller bezañ yac'h hep debriñ. Evit dougen ur sac'h war ho kein a-hed kilometradoù e rankit debriñ evit kaout nerzh. Debrit. Debrit ! C'hwi oar, plijadur a ra din kaout unan yaouank ganin rak abaoe m'emañ va mibion er skol-veur ez on un

tammig dilezet, ne zeuont ket alies da'm gwelout, dedennet int o gant traoù estreget labour ur vereuri. Ar re yaouank a gemm, c'hwi oar".

Ne lavaren grik, selaou a raen ar vaouez gant kalz aked. Hi he doa dibabet he buhez : labourat an douar, magañ ha desevel he bugale; me, va hini a oa : beajiñ, tec'hout diouzh ul lec'h evit mont d'unan all, anavezout pep tra.

"Eürus on, c'hwi oar, gant va gwaz. Bevañ a reomp en un doare dereat, ne c'hounezomp ket kalz arc'hant, met a-walc'h evit paeañ studioù hon bugale".

Ne ouien ket penaos trugarekaat ar vaouez-se he doa leuniet va c'halon a levenez, ha va stomok a voued. Spi a'm boa da gavout tud all heñvel outi war va hent. He c'huitaat a ris goude bezañ leinet mat. Goulennet 'm boa diganti ha skoazell a felle dezhi kaout evit he labour er vereuri met nac'hañ a reas. Neuze ez ad-plegis va zeltenn hag ez adkemeris an hent. Dek eur e oa, hag an heol tomm a skoe war va choug. E-pad pell amzer e soñjis er vaouez a'm boa kuitaet. Dilezet e oa gant he bugale ha stag-tre e oa outo. Mar 'm bije lavaret dezhi e oan tec'het diouzh va zi, n'he dije ket va c'homprenet. Eviti ar vugale a zle bezañ eürus en o zi, an tiegezhioù gant tabutoù etre kerent ha bugale na weler morse. Forzh penaos koun a zalc'his bepred eus ar vaouez-se.

Kregiñ a raen da zizoleiñ e oa brav an natur, an dra vravañ er bed marteze. Morse ne c'hallfen bevañ en ur gêr hep gwez na geot, nann an natur a'm boa ezhomm anezhi. Bep gwech ma spurmanten ur wazhig e tereden daveti hepken evit he c'hlevout o ruilhal, hepken evit tañva dour naet, pur, frouezh an natur. Ur wech e saveteis ul labousig gloazet, eñ ivez en doa c'hoant bezañ dieub, nijal. Un nebeut devezhioù goude e kejis gant Oli. Flemmet e oan bet gant ur wespedenn e'm zroad, ha ne oan mui evit kerzhout, rak koeñvet e oa. Ne'm boa tamm louzeier. Edon azezet en ur park nepell diouzh an hent, pa spurmantis ur paotr war vord an hent. Huchal a ris en ur hejañ va dorn. Eñ a chomas a-sav hag a sellas ouzhin, neuze e paouezis va sinoù. Tostaat a reas ouzhin ha goulenn

diganin perak e'm boa e c'halvet. Diskouez a ris dezhañ va zroad.

"N'on mui evit kerzhout, ha va zroad ne zigoeñv ket".

Souezhet e oan o welout en doa eñ ivez ur sac'h war e gein. Digeriñ a reas e sac'h, koavon en doa dre eurvad. E-pad m'edo o frotañ va zroad e sellen outañ a-dost. Bras e oa, blev du rodellet, un dremm rous gant pikoù panez. Va mamm he dije lavaret e oa divalav, me a gave ne oa ket fall. Daoulagad glas-sklaer en doa. An hevelep glaz hag hini ar morioù a'm boa gwelet c'hoazh.

"Poan a'c'h eus ?" a c'houlennas.

"Ya", emezon.

"Gwelloc'h e ve dit chom hep kerzhout e-pad un devezh d'an nebeutañ".

"Un devezh !" a huchis. "Ne c'hallan ket chom amañ, me rank kavout ul lec'h evit plantañ va zeltenn".

Sellout a reas ouzhin ha mousc'hoarzhin.

"Da-unan out ?" a c'houlennas.

Evel just e oan va-unan.

"Te ranko klask samm !"

"Ne ran morse, bale a ran".

Sevel a reas, kemer va dorn.

"Deus", emezañ, "me zo vont da c'houlenn samm evidout".

N'ouzon ket perak, met heuliet 'm eus anezhañ. Ne c'hallan ket ober un dra all, ne'm boa ket c'hoant chom er park-se. Gant poan ez is betek an hent hag ez azezis war va sac'h.

"Eus pelec'h e teuez ?"

"Eus ti va c'herent", a eilgeriis, "ha te ?"

"Me ivez", emezañ o c'hoarzhin.

Goulenn a ris :

"Te gred emaint ouzh da glask ?"

"Nann, perak ?"

Ya, gwir e oa, perak ? Ne'm c'haront ket, va c'herent, ned afent ket da'm c'hask.

"Arc'hant 'c'h eus ?" emezon.

"Nann", emezañ, "pa'm bez ezhomm e labouran, forzh pelec'h,

ober a ran forzh petra".

Pa lavariz dezhañ ne oan nemet c'hwezek vloaz e lavaraz din :

"Te a zistroy da'z ti, da'z oad ne guitaer ket ar gêr da vat. Te a zistroy, te a welo : a-walc'h a'z po gant ar vuhez a renez bremañ !"

Pa soñjan hiziv er c'homzoù-se e verzan ne oa ket atav ar gwir gant Oli.

- "Nann", emezon, "ne zistroin ket, ne'm eus ket c'hoant distreiñ. Bremañ e vevan ar mare plijusañ eus va buhez".

Treiñ a rae e benn gwech an amzer evit sellout ouzhin. Edomp o klask samm abaoe ur c'hardeur ha karr ebet ne chome a-sav. Perak, met perak e konten dezhañ va buhez. Lavaret en doa din e'm skoaz-ellfe da gavout ul lec'h da gousket, hag e kendalc'hfe gant e hent goude. Moarvat e santen ned afe ket kuit. Goude un hanter eur e chomas ur c'harr a-sav. Hanter gousket e oan ha poan a'm boe o sevel. Ar blenier a c'houlennas da belec'h ez aemp. Ne glevis ket respont va c'heneil gant trouz ur c'harr o tremen. Ur wech er c'harr e lavaraz din :

"Va anv zo Olivier, ha da hini ?"

- "Dan", emezon.

Mousc'hoarzhin a rae atav. Blenier ar c'harr ne gomze ket kalz, c'hwitellat ha kanañ a rae atav, o teurel ur sell warnomp gwech an amzer. War-dro ugent kilometr hor boa graet pa ziskennjomp eus ar c'harr. Azezañ a rejomp war vord an hent hag Oli a zigoras e sac'h evit tennañ un nebeut boued dioutañ.

"Kemer", emezañ.

Ne fiñvis ket, gouzout a raen n'en doa ket kalz arc'hant.

"Kemer", a adlavaraz, "me oar e'c'h eus naon".

Hag ez asantis. Neuze ez adkemerjomp penn an hent. Oli a gerzhe buan, ha gant an amzer bonner e'm boa poan o heuliañ. Goude tri c'hant metr, ne oan mui evit kerzhout, azezañ 'ris war ar geot, hanter vadaouet e oan, ha poan a'm boa e'm zroad. Oli en dije gallet kenderc'hel gant e hent ha va lezel war e lerc'h. Met nann, treiñ a reas, sellout ouzhin ha dont davedon. Azezañ

a reas e'm c'hichen ha flourañ va dremm.

"Paour kaezh Dan, da droad ? Poan 'c'h eus ?"

Ober a ris ya gant va fenn. Takennoù c'hwez a ruilhe war e zremm a lufre gant an heol.

"Te a c'hell kenderc'hel da vont", a lavaris, "lez ac'hanon, ne vin ket evit da heuliañ".

"Nann", emezañ.

Hag e komzas ganin diwar-benn e vuhez.

"Edon o chom en un tiegezh bourc'hiz kenañ hag e oan me vanan bourc'hiz ivez. Hag un deiz ez on bet heuget o welout e oa an arc'hant pouezusoc'h eget ar garantez. Da seitek vloaz e'm eus kuitaet ar gêr, ugent unan on bremañ hag abaoe pevar bloaz ne'm eus ket bet kelou eus va c'herent. Int kennebeut n'o deus bet morse c'hoant va adwelout. Abaoe e vevan ur vuhez paour met eürus. Beajiñ a ran kalz ha labourat amañ pe ahont. A-wechoù te oar ne zebran ket e-pad daou pe dri devezh. Anavezet 'm eus pep tra er vuhez. Bevet 'm eus tost ur mizvezh gant hipied. Kemer a raen dram, drammet e oan bemdez. Hag e'm eus o c'huitaet evit anavezout traoù all. Abaoe ne'm eus ket adkemeret dram".

Me ivez a'm bije bet tro da gemer dram; er skol, skolidi 'zo a guzhe H en o sac'h-kreionoù.

Oli a veaje kalz ha me a'm befe graet tro ar bed gantañ, me gred. N'ouzon ket perak e chomen gantañ, gouest e vefemp da vont pep hini diouzh e du, met nann, a-gevret e oamp ha gantañ e'm boa c'hoant chom. Piv oa ar paotr-se ? Ne ouien ket ha ne'm boa ket c'hoant e guitaat. Me gred e oan eveltañ, eveltañ e'm boa c'hoant beajiñ.

Da c'hwec'h eur ez errujomp en ur gêriadennig. Da gentañ holl e klaskjomp ul lec'h evit plantañ an deltenn. Aes a-walc'h e oa da gavout. Mont a ris d'ober un nebeut prenadennoù. N'ouzon ket perak, met aon a'm boa e tec'hfe Oli kuit. Krenañ a raen, hag o vont er-maez eus ar stal e redis war-du al lec'h m'edo va c'heneil. Ne welen den, neuze e youc'his "Oli !" Oli a zeuas er-maez eus an deltenn souezhet, lammat a ris en e zivvrec'h.

"Sell 'ta, ne'c'h eus mui poan e'z troad".

Nann, evit mont war-du Oli, ne santen mui ar boan.

"Petra eo an deltenn a'c'h eus ?" emezañ. "Brein ha roget eo. Ar seier a vo lakaet enni ha te a gousko e'm hini";

"Ya", emezon, met gouzout a raen e'm bije kousket en e hini zoken ma ne vije ket bet roget va hini.

Se eo ar garantez ? Ur garantez disheñvel diouzh ar re a'm boa anavezet gwechall gant paotred all. Padrig ? Ho ! Nann, ne oa ket karantez. Ne gav ket din. Se a'm eus komprenet diwezhatoc'h. Ne anavezen Oli nemet abace un nebeut eurvezhioù ha ne'm boa mui c'hoant e guitaat.

En noz-se e voe arnev, goude an amzer bonner a oa bet. Tamolodet e oan e divvrec'h Oli.

"Ha mar nij an deltenn ?" a lavaren.

"...e nijimp ivez", emezañ.

P'edon gantañ e tisoñjen e'm boa riv, aon, naon ha poan. Ne soñjen ket alies e'm ziegezh, evidon e oa ur bajenn troet, ur vuhez nevez a oa dirazon, ar vuhez a c'hoantaen. Int kennebeut ne soñjent ket kalz ennon, me zo sur. O buhez ne oa ket kemmet, rak ne oan netra, pe dost, en o buhez. Va breudeur ha c'hoarezed a gendalc'ho gant o studioù. Ne raen nemet tremen en tiegezh. Degouezhet on, estren on bet bepred d'ar pezh a rae ar re all. Hag on aet kuit. Ha gant Oli e krogen va buhez wirion, erruet eo ha me ne c'houlennen netra, netra nemet bezañ dieub.

Diouzh ar mintin o tihuniñ e oa tavet ar gorventenn. Ur red-dour a oa nepell diouzh hon teltennoù. Mont a rejomp d'en em walc'hiñ enni. Oli a daole an dour skornet warnon hag e redemp dre ar parkeier. Hag e kouezhen. Hag ez adsaven. Oli a adpake ac'hanon hag en em gannemp. Karantez e oa, me zo sur. Oli a oa naet daoust dezhañ kaout dilhad lous.

"Ro din da zilhad", a lavaren dezhañ. "O gwalc'hiñ a rin er red-dour. Prestañ a rin dit va re da c'hortoz".

Divizet hor boa chom en hevelep lec'h e-pad an deiz. Pourmen a raemp dre ar parkeier o kutuilh bleunioù evit o lakaat en hon

blev hag en hon dilhad.

Oli ne gomze ket kalz eus e vuhez tremenet, ne rae forzh eus an tremened. Evidon ivez e oa ar bremañ hag an dazont ar pouezusañ, arabat e oa chom stag ouzh soñjoù an tremened. En em c'houlenn a raen perak ne'm boa ket kuitaet an tiegezh a-raok, perak e'm boa kollet kement a amzer pa oa traoù d'ober er vuhez ? Ne oa nemet Oli a gonte evidon. Petra 'm bije graet ma ne'm bije ket kejet gantañ ? Baleet, baleet. Kejet 'm bije gant ur paotr all marteze, a vije bet heñvel, pe disheñvel diouzh Oli, a'm bije karet evel ma karen Oli. Ya, me gred e karen Oli, evidon e oa meur a dra a-gevret : un tad, ur breur, ur garantez, pe muioc'h zoken. Rannañ a raemp pep tra : ar c'hudennoù, ar boued, ar sigaretennoù kement hag ar garantez.

"Petra 'raimp pa n'hor bo mui arc'hant ?" a c'houlennis un noz.

- "Labourat a rin", a eilgerias.

- "Nann", emezon, "labourat a raimp".

- "Petra 'ouzout ober ?"

- "Ket kalz tra", emezon, "met gant kalon ha nerzh e teuin a-benn d'ober pep tra".

- "Te oar", a lavare din, "gouzout a ran ober bravigoù e ler, metal ha koad. Graet 'm eus c'hoazh. Gallout 'rafemp o gwerzhañ, evit gallout bevañ".

Bevañ ? Ya, debriñ ha kousket. Ne gomprenen ket penaos e oa tud o tispign o holl arc'hant evit kaout ar "confort" pa c'haller bevañ heptañ.

Prenañ a rejomp ler ha metal gant an nebeut arc'hant a chome ganimp. Hag e krogjomp da labourat. Oli a oa ampart, deskiñ a rae din ober gwalennoù, troioù-brec'h. Dedennet e oan gant seurt labour, hag e oan laouen o soñjal e werzhfen frouezh va daouarn. An endervezh a dremenas buan ha n'hor boa ket graet kalz bravigoù.

"Desket 'm eus ober se p'edon o vevañ gant hipied", emezañ.

En noz-se e teuas ur c'houer d'hon dihuniñ.

"Nann, met petra eo se", emezañ, "dont da gampiñ e'm fark.

Ne c'houlennin ket arc'hant diganeoc'h mar skampit kuit diouzhtu".

- "Bremañ ?" eme Oli, "unnek eur eo !"

- "Komprenet ? Skampit kuit diouzhtu pe e c'halvan ar fliked".
Hag ez eas kuit.

"Ar fliked ?" a soñjis, "ya, gwelloc'h eo skampañ".

Oli a zivonte an teltennoù e-pad ma sklerijennen al lec'h gant ul lamp-godell. Soñjal a raen er goueriadez a'm boa kejet ganti an deiz ma'm boa kuitaet ar gêr, kredet 'm boa e oa an holl evelti ! Pebezh huñvre ! Hag ez adkemerjomp penn an hent. Tremen a rejomp an nozvezh o pourmen dre ar maeziou. Dindan goulou al loar e valeemp, va dorn e dorn Oli. Pep tra a oa burzhudus, gant Oli, pep tra a oa brav. Ar vuhez-se a'm befe renet betek dibenn va buhez... Pegen pell edon diouzh an dud o doa va c'hasaet, diouzh an dud o doa nac'het va c'hompren. Ne oan ket evelto, ne oan ket evit degemer ar bed evelto, ne oan ket evit asantiñ d'an droug, d'an direizhder, d'ar gasoni, hag en em c'houlenn a raen hag e kavfen ur bed disheñvel un deiz ! Ne'm eus ket gortozet bezañ brein evit klask ar bed-se. Er vuhez a renen gant Oli ne oa nemet karantez, karantez etrezomp, karantez ouzh an natur, al loened, karantez ouzh ar vuhez. A-raok kejañ gant Oli, ne ouien ket e oa ken bras, ken brav ar garantez, e pep jestr, e pep ger e oa karantez. Huñvreal a raen e tremenen va buhez-pad gant Oli, eñ eo en doa va lakaet da anavezout ar garantez ha ne soñjen ket e c'hallfen karout ur paotr all e'm buhez.

Koulskoude e'm boa kejet gant paotred all, bravoc'h, speredekoc'h, pinvidikoc'h eget Oli, met ne oan bet morse dedennet ganto. Pa gomzen ganto eus ar vuhez a'm befe karet ren, e lavarent e oan un tammig foll, un tammig klañv. Oli eo an den kentañ n'en deus ket lavaret din e oan foll, pe neuze e oamp foll hon-daou.

Prenañ a ris un dorzh-vara, ne c'hallen ket prenañ muioc'h, n'hor boa mui gweneg ebet. Hag e labouris gant Oli a-hed ar mintin-vezh war ar bravigoù.

"Bremaik", emezon, "e'm eus gwelet ur skritell, ur fest a vo amañ fenoz, gouel ar gêriadenn. Marteze e c'hallimp gwerzhañ un

nebeut bravigoù".

Ur mousc'hoarzh a skedas war e zremm, eñ ivez en doa naon a-dra-sur. Labourat a rejomp an devezh-pad. Edomp azezet war al letonenn e-kreiz kêr, pa zegouezhas daou baotr yaouank. Sellout a rejont e-pad ur pennad ouzh pezh a raemp hep lavarout grik. Neuze ez azezjont en hon c'hichen.

"N'eo ket divalav", eme unan anezho d'egile.

"O gwerzhañ a rit goude ?" eme unan eus an daou a zouge blev hir betek e zivskoaz.

"Ya", a eilgerias Oli, "spi 'm eus".

"Evit gounit arc'hant ?"

"Ya", emezon, "evit bevañ".

Ha d'ar mare-se e fistilhjomp e-pad pell amzer. Plijus a-walc'h e oa an daou baotr. Meur a dec'hadenn o doa graet c'hoazh hag e anavezent mat ar vuhez a renemp. Bremañ e vevent o-daou a-gevret en ur pezh a feurment. Liverien e oant a-vicher, liverien tiez. E dibenn an abardaez e kinnigjont dimp mont d'o zi da goaniañ.

"Ne vo ket ur pred roueel", emezo.

Abaoe pell n'hor boa ket gwelet ur pred roueel forzh penaos. Asantiñ a rejomp.

O fezh ne oa ket pompadus, pell a se. Lous a-walc'h e oa, lous-kenañ zoken. Div vatarasenn war al leur gant un nebeut pallennoù. Un dar du gant al loustoni. Un armelig kozh hanter dorret, un daol ha div gador. Keginañ a raent war ur c'hamping-gaz. Debrñ a ris ur pred mat, daoust d'an asiedoù bezañ lous, ha nerzh a gemeris rak ne'm boa debret tamm abaoe daouzek eurvezh. Ur bern amprevaned a oa er pezh. En ur mare e youc'his, ur pikol kevnidenn a oa o krapat war va brec'h. Ar re all a c'hoarzhas. Petra e oa ur gevvidenn evito ? Razhed a oa diouzh an noz en o c'hamb.

"Deuit d'hon gwelout pa fello deoc'h", eme an daou baotr.

Ne respontis grik. Gouzout a raen hor befe kuitaet ar gêriadenn an deiz war-lerc'h. Ne c'hallfen ket chom re bell en hevelep lec'h. Oli a seblante en em glevout mat gant an daou baotr, e zaoulagad a skede gant al levnez ha gant an alkool ivez, rak an noz-se en doa

evet kalz. Mont a rejont o-zri a-gevret d'ar gouel.

"Gwerzh ar bravigoù", eme Oli, "hag e teui d'hon adkavout er c'hafedi dirak ar blasenn".

Neuze e ledis va bravigoù war ur pallen war ar riblenn. Kalz tud a oa er gouel hag e'm boa chañsoù da werzhañ. Met goude un eurvezh, ne oa gwenneg ebet e'm chakod. Va arvalez kentañ a voe ur plac'hig dek vloaz war-dro a roas din muioc'h eget ar priz goulennet.

Da unnek eur noz eo e'm boe kalz a brenourion, ha nebeut amzer goude e oant holl pe dost gwerzhet. Ar gerent peurliesañ a selle ouzhin gant daoulagad disprizus. Ne raen forzh. Adplegañ 'ris va fallenn hag ez is betek al lec'h m'en doa Oli roet emgav din. N'edo ket er c'hafedi. E glask a ris en engroez. Pa gejen gant ur plac'h eus va oad ambrouget gant he c'herent o lavarout dezhi : "Na ra ket se", "Na bren ket se", "Na gomz ket ouzh an den-mañ", e santen mat he doa c'hoant ar plac'h bezañ dieub. Evelt e oan bet pell amzer. Ha hiziv e'm boa c'hoant skoazellañ ar re a glaske bezañ skoazellet. Mar 'm bije komzet gant ar plac'h-se he dije lavaret din he doa c'hoant tarzhañ, kuitaat ar vuhez arabadus a rene, ha bezañ dieub.

E-pad pell amzer e ris tro ar blasenn, met ne gavis ket Oli. Redek a ris war-du an dachenn vell-droad el lec'h m'hor boa plantet an deltenn, gant spi d'e gavout. Den, ne oa den enni. Neuze e tistrois war ar blasenn, hag e klaskis en-dro en aner. Marteze e kambr an daou baotr ? Skeiñ a ris ouzh an nor. Respont ebet. Ha koulskoude e oa trouz er pezh. Ar razhed ne gomzont ket. Adskeiñ a ris ouzh an nor. Digoret e voe din. Dirazon ur plac'h a-boan pevarzek vloaz, he blev a-fuilh, a c'houlennas diganin petra a c'hoantaen. Goulenn a ris ha n'edo ket Oli er pezh. Ober a reas sin din da vont tre. Pebezh aergelc'h ! Dek bennak a re yaouank a oa holl azezet pe gourvezet war al leur. Spurmantiñ a ris Oli, e c'hervel a ris. Ne respontas ket.

"Pa zihuno", a lavaris d'ar plac'h, "lavar dezhañ emañ en deltenn".

Ar plac'h a asantas ha pa edon o vont kuit e kinnigas din ur sigaretenn. Merzout a ris ne oa ket ur sigaretenn evel ar re all, nac'hañ a ris. Ar plac'h a vousec'hoarzhas.

"Se a rafe vad dit koulskoude".

En em dreiñ a ris war-du Oli ha kompren : eñ ivez a oa drammet. Gervel a ris en-dro e anv, met ne fiñvas ket. Ne ouien mui petra ober. Sellout a ris ouzh dremmoù an holl re a oa er pezh, yaouank flamm e oant holl, bugale. Ne soñjen nemet saveteiñ Oli. Me gred e leñven, ne'm eus mui soñj. Tostaat a ris ouzh Oli, ha sellout e-pad pell amzer outañ. E zremm disliv a vousec'hoarzhe. Ne zeuen ket a-benn da veizañ. Oli o kemer dram ! Mont a ris er-maez. Bale a ris, hep gwelout na klevout netra. Nann, ne oa ket posubl ! Redek a raen a-gleiz hag a-zehou evel ur follez, en ur huchal. Goude ur pennad e tistrois d'an deltenn, ne gouskis ket, e c'hortoz a raen.

"Te a zistroio", a lavaren dibaouez, "te a zistroio". Met tremen a ris an noz va-unan, ne zistroas ket. Kollet e oan. Ne zeuen ket a-benn da grediñ en doa graet se din, goude an devezhioù ha nozvezhioù karantez hor boa bevet a-gevret. Leñvañ, huchal a raen va-unan en deltenn. Met ne oan ket e soñj distreiñ d'ar gêr. Kenderc'hel a rin gant va buhez hep Oli, peogwir en doa dibabet un dra all : an dram. Ne gomprens ket neuze e'm boa ezhomm anezhañ, eus e garantez, ne gomprens ket e karen anezhañ. Edon evel ul loen dilezet ha na adkav mui e hent. E kêr, diouzh an endervezh e'm boa sellet ouzhin en ur melezour. Spontet e oan bet. Ha me e oa, ar plac'h a oa dirazon ? Gant blev difichet, ur c'horf rous ha treut, dilhad roget ? N'en em anavezen mui, ne zeuen ket a-benn da grediñ e'm boa kemmet d'ar poent-se ! Fazi piv ? Fazi petra ? Ne zebren ket kalz, ne gousken ket kalz, n'en em walc'hen ket kalz.

Ar mintin e oa, an heol a oa savet hag Oli ne oa ket distro. Pelec'h edo ? Ha naon en doa ? An arc'hant a oa ganin. Divizet e'm boa kenderc'hel gant va hent, met termal a raen. Mont a ris d'ober un dro d'ar gêriadenn, da brenañ boued. O tont er-maez eus ar baraerdi e kouezhis fri-ouzh-fri gant unan eus an daou baotr hor boa kejet ganto an derc'hent.

"Pelec'h emañ Oli", a c'houlenis.

"-Oli, n'ouzon ket, nann, ne'm eus ket e welet".

"-Met ganit e oa dec'h da noz", a huchis.

Ar paotr ne respontas ket hag a yeas kuit. Ne gav ket din e klevas ar gunujenn a daolis dezhañ. Ne'm boa ket fiziañs er paotrese hag en e geneil. Hegerat e oant bet ganimp, ya re hegarat zoken, faos e oant. Santet 'm boa se diouzhtu. Ne'm boa lavaret netra da Oli, rak soñjal a raen en dije gwelet sklaer. Rannet 'm boa an arc'hant gounezet en derc'hent. Lodenn Oli a'm boa lakaet en ur frilien, e'm chakod.

Distreiñ a ris d'an deltenn. En ur vont tre e huchis, un den a oa enni. Oli e oa ! Stouiñ a rae e benn. Gouzout a rae e oan en e gichen. Ne lavare grik, me kennebeut.

Goude pemp munutenn e lavaras :

"Ne bardoni din morse, 'keta ?"

"-Petra ?" emezon.

"-Me oar out deuet d'ar gambr, me oar e'c'h eus va gwelet, me oar ivez e ouzout pep tra".

"-Oli", emezon, "un dibab a'c'h eus d'ober, an dram pe me".

Va c'halon a lamme buan, krenañ a raen. Marteze ne'm bije ket dleet ober ar goulenn-se. Oli a sellas ouzhin gant daoulagad truezus :

"-Dan, te oar, ne c'hallfen ket da guitaat. Dan, me gar ac'hanout, te oar ervat".

Stardañ a rae va dorn ken kreñv ma kreden e oa o vont da derriñ un askorn. N'eo nemet pa adsavas e benn e verzis e oa daeroù o ruilhal war e zivjod.

"Oli, te leñv".

"-Dan, me c'hell prometiñ dit ne'z kuitain mui morse".

Kemer a ris ar frilien a'm boa lakaet a-gostez.

"Sell, da lodenn arc'hant".

"-Dan, gwerzhet 'c'h eus ar bravigoù !"

Hag e pokas din. Nann, hon c'harantez ne c'halle ket mervel eus un deiz d'egile evel-se. Se oa pezh a c'hoantaemp hon-daou !

Ne'm boa nemet Oli war an douar, va ziegezh a-bezh e oa. Va buhez a oa Oli, e garantez, ar beajoù, ar bravigoù. An deiz war-lerc'h o tegouezhout en ur gêr, dre ma ne gavemp lec'h ebet evit sankañ hon teltenn ez ajomp d'ur c'hamping. Arc'hant hor boa evit paeañ an nozvezh. War-dro seizh eur noz eo e krogis d'en em santout fall, poan benn a'm boa, ha badaouet e oan. Ne lavaris netra da Oli war an taol. Met da nav eur e oan klañv da vat.

"Me zlefe mont da di an apotiker", eme Oli, "met ni zo pevar c'hilometr eus kêr. Gortoz, mont a ran da glask unan bennak a c'hallfe va c'has".

Distreiñ a reas ur c'hardeur diwezhatoc'h. Fulor e oa.

"Den", emezañ, "den ne fell dezhañ va c'has. Bandenn voc'h".

Oli a yeas kuit en-dro. Gortoz a ris un hanter eurvezh hag e kouezhis kousket. Oli a'm diunas.

"Dan, sell da louzeier".

"-Penaos e'c'h eus graet ?"

Ne respontas ket diouzhtu.

"-Te oar, ne oan ket evit ober a-hend-all, laeret 'm eus ur c'harr"

"-Petra !"

"-Ya, met bez sioul, n'on bet gwelet gant den".

"-Oli, te 'c'h eus graet se evidon ?"

"-Ya, Dan, evidout !"

Diouzh ar mintin e voemp dihunet gant tud plijus-kenañ : ar fliked ! Ober a raent tro ar c'hamping ha goulenn o faperioù digant an dud. Hon faperioù ! Ne'm boa tamm paperioù ! Oli kennebeut. O c'holllet en doa abaoe pell.

"Ho paperioù", a adlavaras an archer. Ne oa ket divalav. Trist e oa gwelout ur paotr ken brav oc'h ober ar vicher-se. E selloù a gouezhe warnon. Oli a rae van da furchal en e sac'h.

"O c'holllet 'm eus", a lavaras a-benn ar fin.

"-Ha c'hwi", emezañ o sellout ouzhin. Ne respontis ket hag e komprenas.

"Deuit ganimp", eme an archer.

"-Da belec'h", a c'houlennis.

Ne respontas ket. Sellout a ris spontet ouzh Oli. Pa guitajomp ar c'hamping e selle an holl dud ouzhimp. Int o doa paperioù, ya, met int o doa nac'het mont da di an apotiker dec'h da noz. Un tammig badaouet e oan c'hoazh. Derc'hel a raen krog e brec'h Oli. Pa welis karr-samm ar flied e'm boe c'hoant a-greiz-holl tec'hout, nann ne'm boa ket c'hoant mont ganto. Oli, eñ, a gompene e oa gwelloc'h sentiñ, ne servijfe da netra tec'hout. A-raok pignat er c'harr e c'houlennas unan eus ar flied :

"Deoc'h eo ar c'harr-se ?" o tiskouez un daou-varc'h ruz.

Oli a zeuas da vezañ gwenn. Hag e krede ne oa ket bet gwelet gant den ! Me gred ! Er c'harr-samm en em starden ouzh Oli. Lenn a rae ar spont e'm daoulagad, stardañ a reas va dorn en e hini, ha mousc'hoarzhin gant poan, evit va c'halonekaat.

ARCHERDI. Diskenn a rejomp eus ar c'harr ha mont tre. Ar c'homiser hon degemeras :

"Petra zo ?" emezañ d'an archerion.

"-Hep paperioù, dec'h da noz, ur c'harr laeret".

Oli a glaskas komz met a voe lakaet da devel. Ar c'homiser a sellas ouzhimp eus an traoñ betek ar penn.

"Hoc'h anv ?"

"-Olivier Court". An deiz-se eo e klevis e anv tiegezh evit ar wech kentañ. Ar c'homiser a skrive : chomlec'h, oad h.a. Ha goude e voe da'm zro.

"Gortozit", eme ar c'homiser o vont d'ar sal e-kichen. Oli ha me hor bije gallet tec'hout, met nann, chom a raemp difiñv. Ne greden ket komz, rak gwelout a raen e oa Oli ankeniet. Ne oan nemet c'hwezek vloaz hag edon etre daouarn ar flied. Ar munutennoù a'm eus tremenet o c'hortoz distro ar c'homiser o deus seblantet padout bloavezhioù. A-benn ar fin e tigoras an nor. Ar c'homiser e oa. Ne sellas ket ouzhimp. Azezañ a reas ha skrivañ un nebeut linennadoù. C'hwezhañ e fri. Skrivañ un nebeut linennoù c'hoazh. Furchal a reas en ur bern paperioù, neuze e sellas ouzhimp, ouzhin kentoc'h.

"Ho kerent a oar, dimezell, emaac'h amañ ?"

Pebezh goulenñ droch, evel just ne ouient ket e oan en un archerdi. Ne respontis ket, neuze eo eñ a respontas e'm flas : "Ya". Chom a ris difiñv evel seizet ! Amzer en doa bet ar pemoc'h-se da bellgomz dezho. C'hoant 'm boa leñvañ. Penaos ez echuo an istorioù-se ? Oli a stoue e benn, eñ ivez a gomprens e oa dibenn ar vuhez "peurbadel". Un archer a zeuas er pezh hag a dapas krog e'm brec'h. Sachañ a ris en ur sellout outañ spontet.

"Goustad", eme ar c'homiser, "goustad, an Aotrou zo vont d'hoc'h adkas d'ho ti".

"Nann", a youc'his. "Nann". Hag en em stardis ouzh Oli. "Oli, nann, ... Oli..."

Neuze e huchis, an archer a bake taolioù ha d'e dro e skoe warnon, evit va sioulaat. Kaset e voen betek ar c'harr, ha dre ar prenestr e welis dremm Oli, daerou o ruilhal war e zivjod. Staget e voen evit na c'hallout mui fiñval. Va sac'h a oa e'm c'hichen.

Ar mogerioù a oa gwenn, en ur gwele e oan.

"Pelec'h emeon ?"

Hag an holl skeudennoù a zistroas : Oli, ar c'harr laeret, ar paperioù, ar fliked, ar c'harr ma'm boa kousket. "Oli !" a huchis. N'edon ket er gêr evel m'en doa lavaret ar c'homiser met en ur glinikenn. Sevel a ris met kouezhañ war al leur. Poan a'm boa e pep lec'h. Gloazet e oan bet moarvat oc'h en em gannañ gant ar fliked. Ar moc'h ! Kerzhout a ris gant poan betek an nor. Prennet e oa ! Neuze e skois outi. Nebeut amzer goude e teuas unan bennak. Sellout a ris outañ spontet, ur c'hlañvdiour e oa moarvat. Ne lavare netra.

"Pelec'h emeon ?" emezon.

"Chom sioul", a eilgerias, "te zo bet fiziet en ur bredvezeg, a raio war da dro, a'z pareo".

"A'm fareo ? N'on ket klañv, me. Ket muioc'h egedoc'h, nag ar bredvezeg !"

Ar paotr a serras an nor hag he frennas. Ar prenestr a oa serret ha ne oa ket tu din d'he digeriñ. Met petra raen, me, er gambr-se ?

Ha petra raes, te, Oli, e-keit-se ? Etre daouarn ar fliked moarvat. Ne'z kwelin mui, met ober a rin tro ar bed evit da adkavout. C'hoant 'm boa skrivañ met ne'm boa na paper nag ur c'hreion. Digeriñ a ris va sac'h ha kavout ar bleunioù a gutuilhen gant Oli, dec'h, derc'hent dec'h hag an devezhioù a-raok, ar bravigoù a rankemp gwerzhañ. Petra ober ? Ne ouien ket, neuze e leñvis e-pad pell a-raok kouezhañ kousket.

Dihunet e voen gant trouz unan bennak o kas din peadra da zebriñ. Ne'm boa ket naon. Goulenn a ris digant ar plac'h ha sigarettenoù he doa, met ne respontas ket, serriñ a reas an nor goude bezañ taolet warnon ur sell leun a spouron ! He c'hunujennet 'm bije Marteze e oa ur skritell peget ouzh va dor "DAÑJERUS". Ne oan ket foll, ne oan ket un diaoulez, ne'm boa morse lazhet den, ne'm boa kleñved pegus ebet ! Pet eur e oa ? Ne ouien ket. Ne ouien ket pelec'h edon, pe zeiz e oamp, pet eur...

Kousket a ris hep debriñ. Pa zihunis e oa later er-maez, an heol ne oa ket savet c'hoazh. Ar mintin e oa, an hañv. Va lein a oa bet servijet din war an daol. Evañ 'ris ur banne kafe evit kemer nerzh. Ne'm boa tamm rikoù-emwalc'hiñ, ha ne oan ket brav da welout gant va dilhad roget, va blev lous, va dremm leun a wad. Marteze e raen aon ! Ur wech gwalc'het ha fichet marteze ez anzavo ar mezeg en doa faziet : "n'on ket klañv". Ur sonetez a oa e'm c'hambr, neuze e sonis. Ur c'hlañvdiour a zeuas, an hevelep hini ha dec'h. Goulenn a ris digantañ da bet eur e welfen ar bredvezeg.

"E dibenn ar mintinvezh".

Degas a reas din rikoù-emwalc'hiñ. Karet 'm bije bezañ komprenet gant an dud, ha daoust hag e vin komprenet gant ar medisin ? Degouezh out a reas a-benn ar fin, amzer a'm boa bet d'en em walc'hiñ ha d'en em fichañ. Yaouank a-walc'h e oa. Klask a ris mousc'hoarzhin met ne zeuis ket a-benn.

"Demat", emezañ, "mont a ra ?"

Pebezh goulenn droch, pebezh imbesil, penaos e c'hallfen bezañ e'm herr, toullbac'het en ur gambr a-hed an deiz !

En derou ne gomzen ket kalz, ne'm boa ket fiziañs, perak kontañ

va buhez da hennzh ? Met tamm-ha-tamm e kontis dezhañ ar vuhez a'm boa renet gant Oli.

"Peadra da skrivañ ul levr", a lavaras din. "Met te rank distreiñ gant da gerent".

- "Nann", emezon, "kentoc'h mervel eget adkavout ar vuhez dister ha borodus a veven ganto. N'o deus ket c'hoant va c'hompren !"

- "Marteze e teuint da'z kwelout", emezañ.

- "Nann, nann", emezon o kregiñ peg e brec'h ar mezeg, "ne'm eus ket c'hoant o gwelout".

- "Mat-tre", emezañ o sevel.

Edo o vont da'm c'huitaat pa c'houlennis digantañ :

"Pegeit amzer e chomin emañ ?"

Ne respontas ket, hag e serras an nor o prenañ gant sked. Eñ a bareo ac'hanon ! Penaos pareañ tud yac'h ? Mezeg e oa ? Paet d'ober netra. Deuet e oa da lavarout din distreiñ gant va c'herent. N'eus ket ezhomm bezañ mezeg evit gouzout lavarout traoù ken brav. N'eus nemet Oli a c'halle va fareañ, mard oan klañv. Skrivañ ur romant war va buhez gant Oli ! Skrivañ a rin pa vin deuet er-maez eus an toull-mañ ha te welo, te mezeg, petra soñjan diwar da benn. Te eo a'm lakaio da vezañ foll. Pegen hir e kaven an amzer en ospital ! Ne oan ket evit bevañ hep Oli !

Antronoz pa zeuas ar mezeg, e c'houlennis digantañ ar gwir da gemer va fredoù er sal-debriñ ha da bourmen el liorz. Asantiñ a reas.

"Me 'm eus bet kelou eus Oli", emezañ.

- "Pelec'h emañ ?" Me gred e youc'hen.

- "Ur prosez a vo e dibenn ar miz. Da c'hortoz eo dieub, met diwallet koulskoude".

Ur prosez ! Ar c'harr laeret ! Oli en toull-bac'h e-pad miz-vezhioù ! Nann, ne oa ket posubl ! Leñvañ a raen.

"Na leñv ket", eme ar mezeg. Mezeg pe get, ne c'halle ket va c'hompren.

"Te a adwelo anezhañ a-raok pell".

Pa'z eas kuit e prederiis war ar pezh en doa lavaret din :

"te en adwelo dizale !" Perak en doa lavaret se, evit ober plijadur din, evit adreiñ nerzh din. "Oli", a youc'his. Nann ne c'hellin ket bevañ heptañ, dic'hallus e oa. Bevañ gant Oli, pe na vevañ ! A-walc'h e'm boa o chom er glinikenn. Ne oan ket klañv, petra 'raen er gambr-se va-unan ? Ne'm boa ket kuitaet va c'herent evit en em adkavout en ur glinikenn. Nemet ar moc'h-se ne'm lezint ket da vont kuit.

Da greisteiz e teuas ur plac'h da lavarout din e oa poent diskenn da verennañ. Pa erruis er sal, e voe sellet ouzhin evel ouzh ul loen gouez. Didrouz e oa an holl, o selloù peget warnon. Stouiñ a ris va fenn hag azezañ. Ne oa ket kalz tud eus va oad. Azezet e oan e-kichen ur plac'h hanter gousket, al louzeier moarvat ! Dre chañs ne gemeren ket va re, o zeurel a raen. Ne'm boa ket c'hoant dont da vezañ evelto holl, hanter gousket, ur benveg dic'houest da brederiañ ha da gomz. Reoù 'zo a oa er glinikenn abaoe ur miz ! Aon a'm boa ! C'hoant a'm boa mont kuit, adkavout ar vuhez wirion gant Oli.

Enoet e vezen er glinikenn-se, ne oa diduamant ebet. An dud ne oant ket dedennus ha me kennebeut ne seblanten ket bezañ dedennus evito. Ar bredvezeg a grogen da gavout plijusoc'h, hegaratoc'h. Eñ a oa e penn pep tra, ne oa nemetañ a c'halle divizout pezh a ranken ober. Ne oa nemetañ a c'halle lavarout ya pe nann evit va lezel da vont kuit. Nemet ne c'hoantae nemet un dra, e tistrofen gant va c'herent. An deiz ma asantin e vin pare, emezañ. Me gav gwelloc'h tremen da glañv eget distreiñ d'ar gêr. Klañv e vin a-hed va buhez, mar fell dezho ! Perak mont d'ar gêr ? Ne rafent nemet poan din, re zisheñvel e oan diouto, ne c'hallemp ket en em glevout. Int ivez a vo eürusoc'h hepdon. Ar bredvezeg a roas din chomlec'h Oli. Edo e ti e gerent ! Paour kaezh Oli, eñ a gasa kement anezho.

Ne ouien ket petra lavarout dezhañ, ne ouien ket petra skrivañ war ar bajenn wenn dirazon. Soñjal a raen er mintin ma'm boa kuitaet ar gêr, ur follenn wenn a'm boa ivez, ha ne'm boa skrivet netra. Skrivañ a ris : "Deus da'm gwelout pa gari. Me gar ac'hanout. DAN".

Hag e c'hortozis ur respont. Met lizher ebet ne zegouezhas. Digalon-ekaet e oan. "Ha va ankouaet a'z pefe Oli ? Ankouaet a'z pefe an devezhioù hag an nozvezhioù karantez hon eus bevet a-gevret ?

Ankouaet a'z pefe hor boa divizet bevañ a-gevret hon buhez-pad ? An holl draoù hor boa prometet a vefe steuziet e'z spered ?" Aon a'm boa da zont foll er glinikenn. Ar mezeg, en doa merzet moarvat ne gemeren ket va louzeier, a rae pikurennoù din. Hepken o welout ar strinkell o sankañ e'm c'hroc'hen e teuen foll. Kasoni a'm boa ouzh ar mezeg. A-wechoù e kunujennen anezhañ; eñ a c'hoarzhe.

An deizioù a yae e-biou atav ken arabadus. Betek an deiz ma tegouezhas ur paotr yaouank, ur bloaz pe zaou koshoc'h egedon.

Anaoudegezh a'm boa graet gantañ er predva. Deuet eo davedon, moarvat peogwir ne oa ket tud all eus e oad er glinikenn. Anvet e oa Herve,

speredek ha plijus e oa. En em gavout a raemp alies evit komz a-gevret.

Met disheñvel-tre e oa diouzhin, disheñvel diouzh Oli. Un deiz e komzis gantañ diwar-benn Oli, hag e kontis dezhañ ar vuhez a'm boa bevet gantañ. Leñvañ a raen, me gred, en ur gomz. Morse ne vefen evit ankouaat an holl zevezhioù eürusted ha diaesterioù a'm boa bevet gant Oli.

"Te rank e ankouaat bremañ", eme ar paotr.

"E ankouaat", a youc'his o sellout outañ, "morse, morse ne c'hellin e ankouaat. Morse ne'm eus karet ur paotr evel m'en karan. Oli zo ar garantez vravañ a c'hell bezañ war an douar".

"Mar rank mont d'an toull-bac'h", eme ar paotr, "e tisonji anezhañ, me zo sur eus se".

"Nann, ne c'hallez ket kompren. Oli zo ar vuhez, hep Oli ne vevan ket !"

Ha perak e komzen gant ar paotr-se ? Ne oa ket evit va c'hompren, va lakaat a rae da c'houzañv ha setu holl ! Leñvañ a raen dibaouez ! Paouezet 'm boa da gemer va fredoù er predva betek an deiz ma tegouezhas ar mezeg mousc'hoarzhus e'm c'hambr.

"Oli a zeuio da'z kwelout goude merenn", emezañ.

Ne zeuen ket a-benn da grediñ. Oli... Chom a ris ur pennad amzer mut hag e lammis da gerc'henn ar mezeg, ankouaat a ris e'm boa bet

kasoni outañ. Mar hañvale ken laouen ha me eo peogwir e klaske va skoazellañ marteze. Gouest e vije bet ivez da virout ouzh Oli a zont. Met asantet en doa. marteze e kompene ne oa nemetañ a c'halle ober vad din. A-benn ar fin en doa komprenet un dra bennak. Goude komzoù evel-se e krogis en-dro da vevañ, rak deuet oan da vezañ brein, mervel a raen tamm-ha-tamm, ne welen mui netra er vuhez. Ne welen mui ar bleunioù el liorz, ne welen mui an heol o vont da guzh, netra... netra.

En em fichañ a ris, lakaat dilhad naet, renkañ a ris va c'hambr.

Hag evit ar wech kentañ e kemeris perzh e kaezadennoù ar re glañv er sal-debriñ. Hag evit ar wech kentañ abaoe m'edon er glinikenn e c'hoarzhis, e kontis istorioù evel ar re all. An holl a seblante bezañ souezhet ha laouen war un dro ouzh va gwelout mousc'hoarzhus. Komz a raemp diwar-benn darvoudoù a oa c'hoarvezet er glinikenn, a oa farsus a-walc'h.

Met goude ur pennad e krogjont holl d'ober goulennoù ouzhin diwar-benn va ziegezh, an abegoù o doa va c'haset d'ar glinikenn ! Ne ouien ket petra respont, ijinañ marteze ! Met Herve a respontas e'm flas. Fulor e oan ! Peseurt ezhom en doa ar paotr-se da emellout e pezh na selle ket outañ. Keuz a'm boa da vezañ kontet dezhañ va buhez. Hag ez adpignis da'm c'hambr hep echuiñ va fred.

Da ziv eur hanter e skoas unan bennak ouzh an nor. Ne greden ket soñjal e oa Oli. Ha koulskoude, pa zigoras an nor e komprenis e oa eñ a oa dirazon. Ne fiñve ket, me kennebeut. Neuze e redis davetañ hag e lammis en e zivvrec'h.

"Oli, te eo !"

Ne ouie ket petra lavarout. Azezañ a rejomp war ar gwele, hag en em starden outañ.

"Te oar e vo ur prosez", emezañ, "marteze e'm bo ur bloaz toull-bac'h".

Daeroù a ruilhe war va divjod. Ur bloavezh. Ne oa ket posubl ! Oli ne c'halle ket, me kennebeut. Perak e oa graet ken fall ar vuhez ? Oli n'en dije morse laeret ur c'harr ma n'o dije ket holl dud ar c'hamping nac'het mont da di an apotiker. Kasoni a'm boa

outo holl, soñj a'm boa c'hoazh eus o mousc'hoarzhioù goapaus p'hor
boa kuitaet ar c'hamping gant ar flied.

Oli en doa un dremm skuizh, ankeniet, gouzañv a rae kalz moarvat !

"Degemeret 'c'h eus va lizher ?" a c'houlennis.

"Nann", emezañ, "skrivet 'z poa din ? Gant piv e'c'h eus bet va
chomlec'h ? Nann, ne'm eus degemeret lizher ebet, moarvat eo bet
dastumet gant va c'herent. Pegoulz e kuitaez ar glinikenn ?"

"N'ouzon ket", a eilgeriis o kouezhañ en e zivvrec'h, en ur
leñvañ. "Oli, adkaset e vin da'm zi, ne'm eus ket c'hoant, ha te
a vo en toull !"

C'hoant a'm boa mont d'ober ur bourmenadenn gant Oli er-maez
eus ar glinikenn. Goulenn a ris an aotre digant ur c'hlañvdiour.

"Nann", a respontas, "ar mezeg en deus nac'het".

"Pemoc'h", a lavaris. "Oli, ne'm eus ket kuitaet an toull-mañ
abaoe devezhioù ha devezhioù, pegeit ? N'ouzon ket zoken, a-walc'h
'm eus ! Atav an hevelep pezh, an hevelep dremmwel, an hevelep tud !
N'eo ket ur vuhez. Soñj 'c'h eus pa oamp a-gevret ?"

"Ya", emezañ.

Ne dalveze ket ar boan komz, pep tra a zeue en-dro e'm fenn.
Ne c'haller ket ankouaat seurt traoù. An natur, ar bravigoù, ar
garantez peurbadel. Ya, peurbadel e oa hon c'harantez, den, na netra
ne oa evit he distruj. Me oar e soñje Oli en hevelep tra ha me.
Penaos adkavout ar vuhez-se ? Huñvreoù ! A-raok, pep tra a oa gallus,
met hiziv, pep tra a oa kemmet. Gouzout a raen petra e oa va dazont :
ar glinikenn, e-touez tud klañv ha me o vezañ yac'h, yac'hoc'h
 eget an holl vezeion ! Ha goude ar gêr, ar gerent, ar skol, ar vuhez
arabadus, hep ar garantez, hep ar peoc'h.

Hep karantez Oli e oa dic'hallus din bevañ.

"Oli, te an hini nemetañ a garan er vuhez, Oli gra un dra bennak
evit va saveteiñ".

Pa'm c'huitaas e leñvis. Petra oan me war an douar ? Netra.

Pep tra a oa a-enep din, ne c'hallen mui en em zifenn ! Flastret oan.

Pezh a c'hoantae va c'herent a oa e timezfen un deiz hag e vevfen
en ur gevredigezh vourc'hiz. Ya, se eo pezh a c'hoantaent ! Paour

kaezh kerent, mar goufent pegen pell e oant diouzh ar wirionez.

Ha bremañ, va flas n'edo ket er glinikenn. Ar glinikenn zo graet evit ar re glañv, se zo un dra wir hag a chomo gwir atav. A-walc'h a'm boa, o ! ya ! A-walc'h !

Ur montr a oa bet prestet din gant ur c'hlañvdiour. Evel-se e c'hallen gouzout an eur, ne ouien ket pe zeiz e oamp, met an eur a'm beze pa garen.

An deiz war-lerc'h e voe skoet ouzh dor va c'hambur da ziv eur diouzh an endervezh. Laouen e teredis war-du an nor evit he digeriñ. Spontet e voen, kilañ a ris, ne oa ket Oli, evel ma kreden, met va c'herent. Perak e oant deuet ? Ne'm boa ket c'hoant o gwelout, na komz ganto.

Pokat a rejont din.

"Mont a ra ?" eme va zad.

Ne respontis ket, ne sellen ket outo zoken. Ne'm boa ket c'hoant o gwelout.

"Te oar hon eus gouzañvet", eme va mamm.

Pebezh gaou ! N'o doa ket gouzañvet ! Ne'm c'harent ket, ober a raent van da'm c'harout. Ne c'houzañver ket evit un den a gasaer.

"Treutaet 'c'h eus kalz", eme va mamm.

Ne sellen ket outo, stouiñ a raen va fenn. Va zad a azezas e'm c'hichen war ar gwele.

"Arabab bezañ spontet evel-se", emezañ.

Nann, ne oan ket deuet da vezañ gouez. Met n'oan ket evit gouzañv e vefent ganin, dres e'm c'hichen. Ne'm boa ket c'hoant o gwelout, ha deuet e oant koulskoude. Perak ? Evit va adkemer ? Ar bredvezeg eo en doa o fedet, eñ c'hoazh, pemoc'h. Ne'm boa ket lavaret ur ger, abaoe ma oant degouezhet. Me ouie e kouezhe o selloù warnon. Krenañ a raen.

"Te oar", eme va mamm, "an holl er gêr a zo mall warno da adwelout".

C'hoant a'm boa huchal. Ne'm boa ket c'hoant distreiñ d'ar gêr. Me garfe bezañ ankouaet gant va breudeur ha va c'hoarezed. Ne zegasen netra dezho, hag int kennebeut ne zegasent netra din. Va flas ne

oa ket en o zouez. Re zisheñvel e oan diouto. Ganet e oan bet en o zouez evel ma vez ganet ur gelienenn e-mesk gwesped. Nann, arabat e oa dezho soñjal ennon, arabat e oa dezho gouzañv en abeg din.

"Ar mezeg en deus lavaret din e kuitai ar glinikenn dizale". Ne selaouen ket zoken pezh a lavarent din. Komzet o deus, ne'm eus ket soñj petra o deus lavaret, ne'm eus ket klevet, ne selaouen mui. Huñvreal a raen, ankouaat a raen edont INT, va c'herent, azezet e'm c'hichen. Va zad a gemeras va dorn, en e stardas en e hini. Ne fiñvis ket, hag a-greiz-holl, en un doare sec'h, e tennis kuit va dorn hag e sellis outañ en ur huanadiñ.

Va zad, fulor, a huchas :

"Met petra hon eus graet dit evit ma vefes ken fall ? Petra, Dan ? Respont".

Hag e komzis evit ar wech kentañ.

"Dres, n'hoc'h eus graet netra. Nac'het hoc'h eus pep tra".

"Petra ?" a c'houlennas va mamm ha va zad a-gevret, "graet hon eus pep tra evit ma vefes eürus, ha setu penaos e komzez !"

"Evidoc'h e oa eürus pezh a raec'h, met me ne c'houlennen ket se. Krediñ a raec'h e oa se a c'hoantaen, met nann, faziañ a raec'h, evidon..."

Ne c'hallis ket echuiñ va frazenn, leñvañ a ris. Va c'herent a gomzas etrezo, ne glevis ket pezh a lavarent.

A-greiz-holl e tigoras an nor. Oli e oa.

"Oli", a youc'his hag e teredis davetañ. Leñvañ a raen en'e zivvrec'h. Eñ a selle ouzh va c'herent.

"Demat", emezañ.

"Te eo Oli ?" a c'houlennas va zad. Oli ne respontas ket. "Te eo a'c'h eus lakaet va merc'h da vezañ evel-se..."

"Penaos", a c'houlennas Oli, sioul.

"Dan he deus kasoni ouzhimp, Dan ne gar mui ac'hanomp".

"C'hwi gred he deus ho karet un deiz ?"

"Ya", a lavaras va zad, "Dan ha ni en em gleve mat a-raok, ha dre da fazi he deus kemmet".

Va zad a oa fulor. Me a leñve atav.

"Roet 'c'h eus dezhi soñjoù faos. Rak Dan a zistroio d'ar gêr. Da ankouaat a raio, pa vi te en toull".

"Peoc'h !" a huchis.

Penaos e c'halle va zad bezañ ken drouk, lavarout komzoù ken fall ! Kasoni a'm boa outo muioc'h eget biskoazh. N'o doa ket c'hoant e vevfemp, Oli ha me, a-gevret. Kasoni o doa va c'herent ouzh Oli, se a'm boa gwelet en taol kentañ.

Oli a lavaras war un ton ken sioul hag a-raok :

"Me gar Dan, hi a gar ac'hanon, bevañ a raimp a-gevret !"

"A gredit", eme va zad. "Goude da bennad amzer en toull he devo Dan da ankouaet. N'eo nemet ur flirt hoc'h eus bet, n'eq ket da c'hwezek vloaz e ouzer petra eo ar garantez. Forzh penaos keit ha ma vo minor e nac'hin ez afe ganit".

Nann, ne c'hallen mui gouzañv komzoù va zad : "ne ouien ket petra e oa karout". Evitañ ar garantez a anavezzer goude an dimeziñ. Nann, karout a raen Oli, ur garantez wirion, kreñv, peurbadel.

"Lez anezho da gomz", eme va mamm da'm zad. "A-benn un nebeut devezhioù e vo kemmet pep tra. Ha te", emezi o sellout ouzhin, "te a chomo amañ betek ar prosez. Goude e vo gwelet petra vo graet ganit. Goude ar prosez e vo kemmet pep tra, te ranko bevañ hep Oli".

Met perak e lavare se din, evit ma c'houzañvfen muioc'h c'hoazh.

Va zad a savas, tostaat a reas ouzhin evit pokat din, met treiñ a ris va fenn. Neuze e pakis ur flac'had. Sellout a ris outañ.

"Keuz a'z po da vezañ graet se. Keuz a'z po da vezañ kunujennet Oli. Keuz, ya, morse ne ankouain. Na zistroit morse da'm gwelout, rak a-hend-all ne gouskin ket e-pad ur sizhun.

Va c'herent a yeas kuit o stlakañ an nor. Oli a floure va dremm.

"Hon dazont a zo heugus", emezañ.

"Te oar Oli, da c'hortoz a rin. Da c'hortoz a rin Oli. Hag ez advevimp a-gevret. Hag ez in da'z kwelout pa vi en toull !"

Oli a'm c'huitaas hag e chomis va-unan. War-dro c'hwec'h eur e teuas ar mezeg. Hag e leñvis peogwir edo eñ o c'hoarzhin. Eñ eo en doa aotreet va c'herent da zont da'm gwelout, pa'm boa-me nac'het.

"Dont a rin da vezañ foll en ho klinikenn vreïn, ne'm boa ket

c'hoant gwelout va c'herent, ha c'hwi hoc'h eus o lezet da zont !
Met perak ? Perak ?"

"N'out ket bet laouen ouzh o gwelout ?"

"Nann, deuet int evit lavarout komzoù drouk, komzoù dister ha faos. A-walc'h 'm eus o vezañ amañ, o vezañ pareet pa n'on ket klañv. Ho pikurennoù a'm lazho un deiz. Ne c'hallan mui prederiañ, na skrivañ, na lenn".

"Ne gomprenet ket", emezañ, "eo evit da yec'hed e reomp se !"

"Va yec'hed ! Va yec'hed a oa gwelloc'h a-raok din dont en toull-mañ ! Pegoulz e kuitain ar gambr-mañ ?"

"Gouzout a rez ! Da vare ar prosez".

Ne respontis ket, nann ne'm boa mui nerzh evit tabutal. Va dibab a oa ar glinikenn pe ar gêr ! Ar bredvezeg a guitaas va c'hambur. Poent e oa, a-hend-all e'm bije skoet warnañ.

"Tec'hout a rin kuit", ar frazenn-se a'm eus adlavaret a-hed an noz, "tec'hout a rin kuit". Ne oan mui evit padout. Abaoe ma veze graet pikurennoù din e teuen da vezañ foll. Ne gouskis ket kalz an noz-se ! Hag an nozvezh a voe hir ! Va c'herent a roe din gwall-huñvreoù. Pa spurmantis sklerijenn an deiz e savis, pemp eur hanter e oa. En em walc'hiñ a ris hag en em wiskañ. Hag e skrivis, evit ar wech kentañ abaoe m'edon er glinikenn. Skrivañ a ris ur varzhoneg a blijed din kalz, ur varzhoneg leun a garantez. Hag e lennis, ez adlennis ar varzhoneg meur a wech.

Pa zeuas ar bredvezeg en he rois dezhañ da lenn. Sellout a reas ouzhin o vousec'hoarzhin.

"Brav, brav-tre eo ! Te a skriv traoù brav, te oar, perak ne skrives ket muioc'h ?"

"Perak ? Peogwir n'eo ket aes na plijus skrivañ en ur glinikenn. Mar befen en natur e skrivfen traoù bravoc'h. Hag amañ gant al louzeier eo diaes prederiañ".

"Reiñ a rin dit nebeutoc'h", emezañ.

Ar mezeg a adlenne ar varzhoneg, war a hañval e plije dezhañ.

"C'hwi oar, ar garantez a'm eus evit Oli a zo gwirion, ne varvo morse".

- "Me oar", emezañ, "nemet pep tra a vo kemmet evidoc'h ho-taou a-raok pell".

- "Marteze, met Oli ne varvo ket e'm spered, pa zeuio er-maez eus an toull-bac'h, en em adkavimp".

- "Ya", emezañ. "Gwelout a ri Oli, hiziv ?"

- "Ya, moarvat e teuio da'm gwelout, perak ?"

Ne respontas ket.

Goude merenn ez is d'al liorzh. Kalzik re glañv a oa hag en em c'houlennen penaos tec'hout. Marteze d'an eur divizet e vefe nebeutoc'h. Oli a zeuas, met ne chomas ket pell, rak lavaret 'm boa dezhañ va soñj. N'en doa lavaret netra. Ne oa nemet an diskoulm-se hag arabat e oa kilañ.

War-dro peder eur e teuis a-benn da dec'hout. Dieub, dieub e oan ! Roet e'm boa emgav da Oli dirak ar sal skeudennva. Redek a ris, en em santout a raen dieub, skañv ! Spurmantiñ a ris Oli a-bell, hag eñ ivez a'm spurmantas. Neuze e redas davedon. Neuze e redjomp a-gevret betek ar stêr. Hag ez azezjomp war ar geot. Adkavet 'm boa ar garantez. Oli ne gomze ket eus an dazont, na me, ar garantez a oa, ne oa nemeti.

Edon pell diouzh ar glinikenn, edon en natur, hag edon gant Oli, se eo a c'hoantaen. An eurvezhioù karantez a dremenis gantañ a oa bravoc'h eget biskoazh. Marteze peogwir o doa steuziet abaoe ur mare. Ne'm boa ket c'hoant komz eus toull-bac'h pe eus kerent, se en defe saotret pep tra. Pa zegouezhas an noz e tivizjomp mont da gousket en iliz, ne ouiemp ket pelec'h mont a-hend-all.

Pa errujomp en iliz e seblante bezañ didud. Sioul e oa. Du-hont, dirak an aoter e oa ur beleg o pediñ. Mont a ris davetañ.

"Va zad, digarezit d'ho tirenkañ, goulenn a ran an aotre da gousket en hoc'h iliz en noz-mañ".

- "Hoc'h iliz ! Met an iliz zo d'an holl, da holl vugale Doue".

Bugale Doue ! Dacust hag e oan merc'h Doue, ne ouien ket.

- "Ne gav ket din", emezon, "ez on bugel da Zoue. Nann, ne c'hell ket bezañ".

- "Perak ? C'hwi ivez a zo merc'h da Zoue".

- "Pa oan bihan, e lavare din va c'herent "Kae d'an oferenn". Hag on aet bep sul d'an iliz e-pad bloavezhioù. Hiziv ne soñjan mui e Doue, ne'm eus ket c'hoant pediñ evit un Doue na anavezan ket. Piv a lavar deoc'h ez eus anezhañ ? Me 'm eus c'hoant kaout prouennoù ! Mar bije un Doue, daoust hag e vije ken brein ar bed ? Ha Doue a lezje an dud d'en em lazhañ kenetrezo ?"

- "Brein eo ar vuhez ?"

- "O ya, va zad ! Evidon eo bet brav, met hiziv eo gwelloc'h disoñjal petra eo va dazont ha hini va c'heneil".

Hag e kontis d'ar beleg kozh va c'hudennoù ! Selaou a rae met ne gomze ket kalz. Ne greden mui e Doue. Klask a rae displegañ din e oa ret din pediñ Doue. Spontet e oa un tammig gant va c'homzoù. Goude holl, ober a rae e vicher, ober a rae oferennoù, dibabet en doa an hent-se !

Hon c'huitaat a reas war-dro dek eur, dipitet gant pezh a'm boa lavaret dezhañ. Morse ne soñjen e Doue, morse ne c'houlennen skoazell digantañ pa'm beze diaesterioù, ne dalveze ket ar boan.

Pell amzer e'm boa kredet e Doue, e Jezuz, en e vuhez. Aet oan d'ar c'hatekiz, desket e oa bet din bezañ merc'h Doue. Aet e oan d'an oferenn da selaou prezegennoù ar veleion. Aet oan da gofes, aet oan da gomuniañ. Hag un deiz e'm eus kroget d'en em c'houlenn hag e oa eus Doue. Ne'm boa morse prouennoù ha ne'm bo morse. Hag un den ijinet e ve Jezuz ? Evit krouiñ ur relijion e oa ret kaout danvez. Abaoe an deiz-se e'm eus paouezet, e'm eus nac'het krediñ en un Doue na anavezen ket. Skeudenn Adam hag Eva a oa un ijinadenn evit displegañ ar pec'hed. Ma ne vije ket bet eus ar skeudenn en em c'houlennje an dud perak ne lame ket Doue, peogwir ez eus anezhañ, holl bec'hedoù ar bed. Evit gwir, ne ouien ket atav ha pec'hiñ a raen pe get. Ur pec'hed a'm boa graet o kuitaat ar gêr ? O karout Oli ? O kuitaat ar glinikenn ? Hag int, polised ha medisined, ur pec'hed o doa graet ouzh va fareañ pa na oan ket klañv ? Ne ouien ket. Hag en em gaven en un iliz, e ti Doue, evel ma lavaront, int kristenion, ha ne oan ket merc'h Doue. Forzh penaos, ti Doue n'en doa ket muioc'h a dalvoudegezh eget forzh peseurt ti, graet e oa bet

gant tud na oant ket kristen marteze. E maen e oa. Ar c'hadoriou a oa e koad. Er savadur-se e vefe tu d'ober kement a draoù : envodoù, kendaeloù, skol, ur sal-c'hoariva, forzh petra. Ar beleg en doa lavaret : "Mar emac'h e ti Doue, pedit eñ, soñjit ennañ". Met me a soñje muioc'h en hon c'hudennoù. Va dazont a oa teñval, ne ouien ket mat penaos e tremenfe an devezhioù. A-wechoù en em greden en ur wallhuñvre a gase Oli d'an toull, ha me d'ar gêr. Ne zeuen ket a-benn da grediñ e oa un dra wirion. Eñ ken yaouank, ken brav, ken buhezek, klozet en un toull e-pad n'ouzon pegeit amzer. Ha me, adkavout ar vuhez a renen a-raok, en ur bed boutin gant tud diseblant.

Oli ne gomze ket, met ne bede ket, me oar. Ar paotr-se a oa eürus a-raok kejañ ganin, pep tra en doa, kement tra a c'hoantae. Ne c'houlenne nemet ar peoc'h. Hag ez on degouezhet. Ne oa ket rediet da chom ganin. Gallet en dije kenderc'hel gant e hent ha va lezel war e lerc'h. Ha me ivez a vije bet gouest da genderc'hel gant va hent an deiz m'en doa kemeret dram. N'hor boa mui adkomzet eus se, ha me oar n'en doa ket kemeret abaoe.

An eürusted en doa kavet ganin a oa bravoc'h eget an hini en doa anavezet a-raok. Met piv a soñje e savfe kudennoù ?

Ha setu da belec'h e'm boa e gaset : d'an toull, eñ a gasae ar flied, eñ na zirenke den, n'en doa bet nemet c'hoant va skoaz-ellañ. Va fazi e oa ! Ya, va fazi ! Met ar garantez a zo un dra a zeu e-unan, ne c'haller ket en em zizober dioutañ. Oli en doa kollet ar mousc'hoarzh a skede war e zremm hag a roe c'hoant bevañ, e zaoulagad n'o doa mui an hevelep glaz, deuet oant da vezañ teñval, trist. Kollet en doa ar sioulder, an huñvre, adkavet en doa ar vuhez en doa kuitaet, o kuitaat e di pemp bloaz'zo. Va fazi e oa ! Kemer a ris e'm godell ur bravig a'm boa graet, me va-unan gant va daouarn. E lakaat a ris en e gerc'henn. Sevel a reas e benn ha sellout e don va daoulagad. Pegen gwalleürus e seblante bezañ.

"Digarez, Oli, digarez", a'm bije bet c'hoant lavarout. Met ne lavaris netra, n'en dije ket komprenet. Ne oan mui evit komz, ur stouf a oa e'm gouzoug. Dre va fazi e c'houzañve. Nann arabat e oa din leñvañ dirazañ. Arabat, nann, arabat, met leñvañ a raen

koulskoude, an daeroù a ruilhe goustad war va dremm. Oli o sec'he gant aked. E zaouarn a floure va divjod, hag e kendalc'hen da leñvañ. Gwelloc'h e oa din leñvañ, se a rae vad din. Ar pouez o flastrañ va c'halon a zeue da vezañ skañvoc'h ha koulskoude gwazh-ouzh-gwazh bep ma tostae deiz ar prosez.

"Ret e vo dit kaout kalz a nerzh, Dan. Dre va zu e klaskin bezañ kalonek".

Arabat e oa dezhañ komz, va fenn a oa kouezhet war e vruched hag e ouelen mui-ouzh-mui. Eñ a glaske va frealziñ hep gouzout e rae muioc'h a zroug. Santout a raen va izili o krenañ.

"Nerzh a'm bo", a lavariz. Met soñjal a raen ar c'hontrol. En e zivvrec'h e leñven ha neuze pa ne vo ket ganin, e peseurt stad e vin ?

Kousket a ris en e zivvrec'h, pa zihunis e kouske c'hoazh. Pegen yaouank e seblante. Un dremm bugel en doa. Karet 'm befe e chomfe gant an dremm sioul-se ur wech dihunet. Piv en defe divinet en doa an dremm-se kudennoù ?

Edon e soñj distreiñ d'ar glinikenn. Met ezhomm a'm boa tremen un nebeut devezhioù gant Oli. Ne c'hallen ket bevañ heptañ. Perak ket tec'hout bremañ ? Tu a vefe. Met ne dalveze ket ar boan. Adkavet e vefemp buan goude bezañ bevet en aon, en anken. Gwelloc'h e oa paeañ ar fazi ha bezañ sioul goude. Goude mizvezhioù er wallhuñvre e vo bravoc'h ar vuhez. Bevañ a rin evit Oli, ur ster a roin da'm buhez. Dor vras an iliz a zigoras hag ur vaouez a zeuas tre.

"Oli", a lavariz en e skouarn, "Oli, dihun".

Dihuniñ a reas ha sellout a-gleiz hag a-zehou. Ne ouie mui pelec'h edo.

"Oli, an oferenn a vo lavaret bremaik, gwelloc'h eo mont kuit".

Ar vaouez a sellas ouzhimp gant disfiz. Santout a raen he doa c'hoant hon c'hunujenniñ. Deuet e oa evit pediñ, evit komz ouzh Doue hag e kave hon-daou kousket dirak an aoter. Oli en doa poan o tihuniñ, sellout a reas ouzhin ha mousc'hoarzhin. Neuze e savas, e talc'has krog e'm brec'h, hag e kuitajomp an iliz. Ar vaouez a droas da sellout ouzhimp.

"Petra 'ri ?" eme Oli.

Mont d'ar glinikenn ? Chom gantañ ? Diaes e oa din e guitaat o kontañ an nebeut devezhioù a chome a-raok ar prosez.

"Distreiñ a rin d'ar glinikenn", emezon.

Ne respontas grik. Ur maen a santen e plas va c'halon, ur maen ponner, re bonner evit va c'horf dinerzh.

Hag e tistrois d'ar glinikenn, goustad. A-wechoù e chomen a-sav hag e sellen war va c'hiz : Oli ne oa mui a-dreñv din ha c'hoant a'm boa redek evit e adkavout.

Den ne voe souezhet pa zegouezhis er glinikenn, den ne sellas ouzhin, den ne gomzas ouzhin, den ne oa bet chalet gant va zec'haden. Kasaat a raen ar glinikenn ha da gantañ-holl ar mezeg a rae war va zro. Ne gomzis ouzh den hag e pignis da'm c'hambr. Ar gambr-se, ne oan mui evit he gouzañv. Trist e oa, mogerioù gwenn, ur gwele ! Huanadiñ a ris. En em c'houlenn a ran c'hoazh penaos e c'hallen chom er pezh-se c'hwec'h devezh a-raok ar prosez, o c'houzout edo Oli o c'houzañv, o leñvañ marteze en abeg din. An toull-bac'h ! Ar ger-se en deus graet din poan a-hed va buhez ! Bepred e'm eus bet kasoni ouzh ar flied n'o deus ket bet c'hoant gouzout perak en doa laeret ar c'harr ! Daou zevezh a-raok ar prosez e c'houlennis an aotre digant ar mezeg da vont da welout Oli peogwir na'm boa bet kelou ebet anezhañ. Moarvat ne c'halle ket dont da'm gwelout. Asantiñ a reas. Hag evit ar wech diwezhañ eus va buhez eo e welis ar mezeg, met se na quien ket c'hoazh. Kemer a ris neuze an tren evit mont betek ti kerent Oli. Ne'm boa na skrivet na pellgomzet dezhañ evit lavarout e tegouezhen. Met gouzout a raen ervat pelec'h edo.

Va-unan edon er c'hombod. Eürus e oan, me gred, me gav din e vousec'hoarzhen va-unan. Ur c'heloù mat a'm boa da lavarout dezhañ : dougerez e oan. An deiz-se edon sur. C'hoant a'm boa bet lavarout dezhañ en iliz, nemet ne oan ket sur, ne'm boa ket kredet komz diwar-benn-se gant aon da faziañ. Ur bugel a'm befe, bugel Oli, va bugel. Flourañ a raen va c'hof ha daeroù a gouezhe war va divjod ken eürus e oan. E-kreiz kasoni, droug ar bed, e oa

hon c'harantez hag ur bugel en defe blev du Oli, e zaoulagad glas, va c'hroc'hen teñval, va mousc'hoarzh. Ar bugel-se a zesavfen pell diouzh an droug, reiñ a rafen dezhañ kement tra a c'hallfen. Hag e lavarfen dezhañ e oa bet graet gant kalz a garantez, ha ket dre wallzarvoud. Hag e lavarfen dezhañ, evit bezañ eürus e oa gwelloc'h dezhañ chom hep anavezout e gerent-kozh. Hag e komprenfe.

An tren a chomas a-sav, met siwazh, n'edon ket degouezhet c'hoazh. Ur plac'h yaouank a zeuas e'm c'hombod. Sellout a reas ouzhin ha mousc'hoarzhin, respont a ris. Ar mousc'hoarzh-se en doa graet vad din goude bezañ bet serret ken pell etre peder moger e-touez tud a'm c'hasae. Ar plac'h-se a oa dimezet, marteze he doa bugale. Moarvat he doa bet an hevelep levenez ha me an deiz m'he doa gouezet e oa dougerez. An tren a chomas ur wech c'hoazh a-sav hag e tiskennis. Ne oan bet biskoazh e ti Oli, en abeg d'e gerent, met displeget en doa din pelec'h edo ar savadur. Ha ne lakais ket kalz amzer evit erruout en ul liorz, ur c'hourliorz zoken, dirak un ti ramzel, a'm befe anvet ur c'hastell. Aze eo en doa Oli tremenet e vugaleaj. Poltred e gerent a zeree mat-tre gant ar c'hinkladur. Mont a ris betek an nor ha skeiñ outi, ne greden ket seniñ, n'ouzon ket perak. Trouz ebet en ti. Kalzik a girri a oa. An tiegezh a-bezh moarvat a oa deuet da welout an hini a yafe d'an toull a-benn daou zevezh. En ur mare e'm boe c'hoant tec'hout, koll a raen nerzh. Nann, arabat e oa kilañ d'ar vunutenn diwezhañ. Evel ma ne zeue den da zigeriñ e sonis. Tregont eilenn diwezhatoc'h e teuas ur plac'h yaouank gwisket gant un davanjer wenn da zigeriñ din an nor. Merzout a ris diouzhtu e leñve hag e oa dinerzh.

"Ha gallout a rafen gwelout Oli, mar plij ?" a c'houlennis.

Ar plac'h a savas he daoulagad leun a zaeroù davedon. Met perak e selle ouzhin evel-se ? Perak ne gomze ket ?

"Piv oc'h ?" emezi gant ur vouezh o krenañ.

- "Ur vignonez dezhañ".

- "Dan ?" emezi.

Gouzout a rae va anv ?

- "Ya", emezon souezhet.

D'ar mare-se e lakaas he fenn war va skoaz en ur lavarout :

"Paour kaezh Dan, paour kaezh Dan".

- "Met perak ?" a huchis, "perak, un dra bennak zo c'hoarvezet gant Oli ?"

Neuze ar plac'h a sankas he daoulagad e'm re hag a lavaras :

"Oli zo marv".

Ar frazenn e'm c'halon a reas kement a boan hag ur bir. Ne oan mui evit fiñval na komz, ne welen mui netra. Santout a raen edon o vont da gouezhañ. Ar frazenn a droe e'm fenn, he c'hlevout a raen evel pa vije bet ar plac'h ouzh hec'h adlavarout dibaouez. Azezañ a ris war an diri hag ar plac'h a azezas e'm c'hichen. Stardañ a rae va dorn. Me grede edo va c'halon o vont da chom a-sav. Ne zeuen ket a-benn da leñvañ, pep tra a chome sac'het e'm bruched. Me gav din edo ar plac'h o komz ouzhin, met ne gleven mui netra. Dantañ a raen va bizied evit chom hep huchal. N'ouzon ket pelec'h e kavis an nerzh da c'houlenn :

"Me c'hell e welout ?"

Ar plac'h a savas, a gemeras va dorn hag a'm sachas e diabarzh an ti. Lakaet e voen da bignat gant an diri, gant poan, ne welen mui netra. Ur ouel a oa dirak va daoulagad. Mont a rejomp tre en ur pezh bras. Kalzik a dud a oa ennañ. Ha n'eo ket diouzhtu e welis ar gwele bras e-lec'h m'edo gourvezet Oli. An holl dud a davas pa zegouezhis. Tostaat a ris goustad ouzh ar gwele hep sellout ouzh den. Degouezhet dres e-kichen, e kouezhis warnañ hag e youc'his, e leñvis. Den ne fiñvas, reoù a yeas kuit. Pa savis va fenn ne welis nemet daeroù. Nepell diouzhin e oa ur paotr o leñvañ, morse ne'm boa gwelet un den gour o leñvañ eveltañ. E dad e oa ? N'ouzon ket, ne'm eus morse gouezet. Tamm-ha-tamm e kuitae an dud ar pezh. Petra 'c'hortozen me ? Va unan e oan gant ar vatezh. Tostaat a reas ouzhin ha kemer va dorn en he hini. Oli a oa brav, brav-kenañ daoust dezhañ kaout ul lienadur war e benn. Gant ur bistolenn en doa graet moarvat. Ne zeuen ket a-benn da grediñ e oa marv. An hevelep dremm hag an hini en doa en iliz a oa gantañ. Me gred eo skeudenn Oli marv a chomas atav e'm eñvor. Oli en doa en-dro d'e

AR GEVNIDENN

c'houzoug ar bravig a'm boa profet dezhañ. Kemer a ris ar varzhoneg a'm boa skrivet evitañ hag he lakais en e c'hodell.

"Me gar ac'hanout", a lavaris dezhañ.

Pegait amzer on chomet er pezh e-kichen Oli ? N'ouzon ket. Pa guitais an ti, ne lavaris netra da zen. Oli n'en deus morse gouezet e'm boa ur bugel e'm c'hof.

Oc'h erruout er gêr, rak kuitaet 'm boa ar glinikenn da vat, va c'herent ne gredent ket komz ouzhin. Moarvat e komprenent e c'houzañven evel ma ne'm boa morse graet e'm buhez c'hoazh. Moarvat e ouient ivez e oa dre o fazi dezho e oa marv, dre fazi ar fliked, dre fazi an holl, va fazi din ivez. Pa lavaris dezho e oan dougerez ne voe respontet grik. Va mamm zoken a brenas ur gwele evit ar bugel da zont.

Ar bugel zo bet ganet, met ganet marv.

Evit an niverson-sek :
Kommandant evit 2 niverson :
Eas an arc'hant da :
G. BIRNNE
C.U.F. 2438 46 NANTES

Novlet kant 2438
C.U.F. Na 21 602

Diskrivet heveze lezenn, trede trizialad 73

AR GEVNIENN

Skrivañ da :

AR GEVNIENN

Maen ar Ya

29 150 CHATEAULIN

Priz an niverenn-mañ : 8 F

Koumanant evit 2 niverenn : 14 F

Kas an arc'hant da :

G. ETIENNE

C.C.P. 2458 46 NANTES

Moulet gant SADED

CPPP Nn 51 605

Diskleriet hervez lezenn, trede trimiziad 73